

# Goulennaoueg dilennadegoù-kêr Questionnaire élections municipales

# 2026

20 goulenn war 5 tem diwar-benn an oberoù fetis evit ar brezhoneg  
a vo kaset da benn ganeoc'h e-pad ho resped.

20 questions sur 5 thèmes concernant les mesures concrètes  
en faveur de la langue bretonne que vous engagerez lors de votre mandat.

DA LEUNIAÑ EN LINENN ARAOK AR 1<sup>añ</sup> A VIZ MEURZH 2026 DRE AL [LIAMM AMAÑ](#)  
A REMPLIR EN LIGNE AVANT LE 1<sup>er</sup> MARS 2026 VIA [LE LIEN ICI](#)

<https://framaforms.org/elections-municipales-2026-et-langue-bretonne-1765634382>

## TEM 1 : AN ARAEZIOÙ ROET D'UR POLITIKEREZH YEZH EVIT AR BREZHONEG THEME 1: LES MOYENS ALLOUES A UNE POLITIQUE LINGUISTIQUE POUR LE BRETON

- 1) Envel un den-dave evit ar brezhoneg (eilmaer.ez, kuzulier.ez-kêr dileuriet)  
Nommer un référent langue bretonne (adjoint.e, conseiller.ère municipal.e délégué.e).

>>> Resisaat – Précisez...

- 2) Krouiñ pe kreñvaat ur post karget a gefridi hanter-amzer / leun-amzer pe fiziañ ur gefridi evit ar brezhoneg d'ur gwazour.ez  
Créer ou consolider un poste de chargé.e de mission langue bretonne à temps partiel / plein-temps ou confier une mission langue bretonne à un.e agent.e.

>>> Resisaat – Précisez...

- 3) Krouiñ pe kreñvaat ur bodad-kêr pe diavaez-kêr gouestlet d'ar brezhoneg  
Créer ou consolider une commission municipale ou extramunicipale dédiée à la langue bretonne.

>>> Resisaat – Précisez...

- 4) Sinañ ar garta "YA D'AR BREZHONEG" kinniget gant Ofis Publik Ar Brezhoneg pe tremen d'ul live uheloc'h  
Signer ou passer au niveau supérieur de la charte "OUI A LA LANGUE BRETONNE" proposée par l'Office public de la langue bretonne <https://www.fr.brezhoneg.bzh/31-ya-d-ar-brezhoneg.htm>

>>> Resisaat – Précisez...

TEM 2 : TREUZKAS AR BREZHONEG  
THEME 2 : TRANSMISSION DE LA LANGUE BRETONNE

- 5) Reiñ lañs pe skoazellañ krouidigezh un hentad divyezhek publik ha/pe katolik (nevez) pe ur skol DIWAN (nevez), kemer perzh d'ar c'houlzad brudañ bloaziek evit ar c'helenn divyezhek [ECOLE.BZH](#)  
Initier ou aider à la création d'une (nouvelle) filière scolaire bilingue public et/ou catholique ou d'une (nouvelle) école Diwan, participer à la campagne annuelle de promotion de l'enseignement bilingue [ECOLE.BZH](#)

>>> Resisaat – Précisez...

- 6) Stummañ gwazourien an ti-kêr war ar brezhoneg hag ar GWATSAMed a labour er c'hlasoù divyezhek-mamm ha gwazourien ar vugaligoù  
Former les agents municipaux à la langue bretonne et spécifiquement les ATSEM intervenant en classe bilingue maternelle et les agents de la petite enfance.

>>> Resisaat – Précisez...

- 7) Diorren an degemer e brezhoneg evit ar vugaligoù (Ti skoazellerezed-Mamm, magourioù...).  
Développer l'accueil en langue bretonne pour la petite enfance (Maison d'Assistants Maternelles, crèches...).

>>> Resisaat – Précisez...

- 8) Goulenn digant servijoù an Deskadurezh-Stad kelenn brezhoneg e-pad an amzer skol er skol kentañ derez hervez ar c'hendivizad a viz Meurzh 2022 sinet etre ar Stad ha Rannvro Breizh hag al lezenn MOLAC (mellad L. 312-11-2 eus Kod an Deskadurezh)  
Demander aux services de l'Éducation Nationale l'enseignement de la langue bretonne sur le temps scolaire en école primaire en filière non bilingue suivant la [convention de mars 2022 signée entre l'Etat et la Région Bretagne](#) et la loi MOLAC ([art L. 312-11-2 du Code de L'Education](#)).

>>> Resisaat – Précisez...

TEM 3 : OBER GANT AR BREZHONEG  
THEME 3 : PRATIQUE DE LA LANGUE BRETONNE

- 9) Diorren plas ar brezhoneg e servijoù ar gumun (ti-kêr, levraoueg, salioù sport, KOSG...)  
[Développer la présence de la langue bretonne au sein des services de la commune \(mairie, bibliothèque, salles de sport, CCAS ...\).](#)

>>> Resisaat – [Précisez...](#)

- 10) Diorren ar c'hinnig hag an degemer dudi e brezhoneg evit bugale ar c'hlasoù divyezhek  
[Développer l'offre et l'accueil de loisirs en langue bretonne pour les enfants des classes bilingues.](#)

>>> Resisaat – [Précisez...](#)

- 11) Broudañ ar c'hevredigezhioù hag ar stalioù da gas ar brezhoneg war-raok, dre ar savenn [STAL.BZH](#) pe ar garta Ya d'ar brezhoneg da skouer  
[Encourager les associations et commerces à s'engager en direction de la langue bretonne, au moyen de la plateforme \[STAL.BZH\]\(#\) ou de la charte Ya d'ar brezhoneg, par exemple.](#)

>>> Resisaat – [Précisez...](#)

- 12) Harpañ ar c'hinnig deskiñ d'an oadourien (prestiñ salioù, kemennadenn e kelaouenn an ti-kêr...), kemer perzh e koulzad bloaziek ar c'hinnig deskiñ evit an oadourien  
[Accompagner l'offre d'apprentissage des adultes \(mise à disposition des locaux, article dans le magazine municipal...\), participation à la campagne annuelle de promotion des cours pour adultes.](#)

>>> Resisaat – [Précisez...](#)

## TEM 4 : GWELUSTED AR BREZHONEG EN TAKAD PUBLIK

### THEME 4 : VISIBILITE DE LA LANGUE BRETONNE DANS L'ESPACE PUBLIC

- 13) Lakaat ur panellerezh divyezhek kirri, dud war droad, beloioù, glad, touristelezh par-ouzh-par (ar memes ment hag endalc'had kevatal en div yezh) . Ivez : « pannelloù polis », pannelloù straed, panellerezh elektronek, parklerc'hioù ha bonnoù parklerc'h, pannellerezh lastezerezh ar gumuniezh-kumunioù pe an tolpad...

Mettre en place une signalétique bilingue paritaire routes, vélos, piétons, touristique, patrimoniale (même taille de caractère et contenu équivalent dans les deux langues). Également : signalisation routière des panneaux dits "de police", plaques de rue bilingues, signalisation électronique, parkings et bornes, signalétique déchets de la communauté de communes / agglo...

[Voir ICI le document de référence de l'Office Public de la Langue Bretonne](#)

>>> Resisaat – Précisez...

- 14) Lakaat ur panellerezh divyezhek par-ouzh-par e savadurioù ar gumun (ti-kêr, mediaoueg, sal ar c'hevredigezhioù, sal-abadennoù, KOSG, salioù-sport...)

Mettre en place une signalétique bilingue paritaire dans les bâtiments de la commune (marie, médiathèque, salles associatives, salle de spectacle, CCAS, salles de sport ...)

>>> Resisaat – Précisez...

- 15) Ober gant ar brezhoneg en un doare kempouez ar gwellañ e kehentiñ an ti-kêr (kelaouenn, lec'hienn internet, lizher-kelaouiñ, rouedadoù-sokial, kartennoù-bizit...)

Utiliser la langue bretonne de façon la plus équilibrée dans la communication municipale (magazine, site internet, entête de courriers, réseaux sociaux, cartes de visites...).

>>> Resisaat – Précisez...

- 16) Ober gant ar brezhoneg en un doare kempouez e bed ar sonioù (responterioù pellgomz, pignerezioù, kemennadennoù dre gomz e treuzdougen ar gumuniezh-kumunioù pe an tolpad...)

Utiliser la langue bretonne de façon équilibrée dans le paysage sonore (répondeur téléphonique, ascenseurs, annonces sonores dans les transports de la communauté de communes ou de l'agglo...)

>>> Resisaat – Précisez...

TEM 5 : UR POLITIKEREZH LEC'HEL EVIT KIZIDIKAAT, LAKAAT DA ANAVEZOUT HA SKIGNAÑ  
AR BREZHONEG

THEME 5 : UNE POLITIQUE LOCALE POUR LA SENSIBILISATION, LA CONNAISSANCE ET LA  
DIFFUSION DE LANGUE BRETONNE

- 17) Kemer perzh da vat en abadennoù rannvroel evit ar brezhoneg evel ar [REDADEG](#) (prenañ KMoù gant ar gumun...), miz ar yezhoù Breizh...

[Participer activement aux événements régionaux en faveur de la langue bretonne comme la REDADEG \(achat de KM par la commune...\), mois des langues de Bretagne ...](#)

>>> Resisaat – [Précisez...](#)

- 18) Programmiñ abadennoù e brezhoneg pe divyezhek galleg-brezhoneg evit an dud yaouank pe evit an oadourien (c'hoariva, kontadennoù) , tañva d'ar brezhoneg en amzer tro-skol...

[Programmer des spectacles en langue bretonne ou bilingues français-breton pour jeune public ou adultes \(théâtre, contes...\), découverte de la langue sur les temps périscolaires.](#)

>>> Resisaat – [Précisez...](#)

- 19) Programmiñ sonadegoù e brezhoneg war dachenn ar sonerezhioù a-vremañ pe war ar sonerezh hengounel

[Programmer des concerts en langue bretonne dans le domaine des musiques actuelles ou du répertoire traditionnel.](#)

>>> Resisaat – [Précisez...](#)

- 20) Sachañ evezh an dilennidi hag ar wazourien war an dalc'hoù liammet ouzh ar brezhoneg ha stummañ anezho

[Sensibiliser et former les élu.es et agent.es aux enjeux liés à la langue bretonne.](#)

>>> Resisaat – [Précisez...](#)